




bremañ

Gilbert CABON : AN TREC'H !

DIWAN : BEC'H ADARRE !



aloubidigezh sez ar P.S. e Roazhon



lizhiri



GOUEL 10 VLOAZ DIWAN SANT BRIEG

Sadorn 19 a viz Mae

Mintin : Doriou digor er skol, livadur gant **Malo LOUARN** ha tresourien all !
Abardaez : Krogad mell-droad **ROAZHON/GWENGAMP.**

Noz : fest-noz vras er skol, 19 bd Carnot, **SANT BRIEG**, a-dreñv d'ar gar, gant **SKOLVAN, CARRÉ MANCHOT, KEMENER/GWILHOU, GELLEG/CARADEC.**

ADKOUMANANTIT
DA V-

breman

150 lur ar bloaz

"BREMAN" a vez lennet ganin. Plijus eo dre ma c'hell an dud displegañ ar pezh a soñjont diwar-benn ar gudenenn-mañ-gudenn. Lennet e vez, avat, frazennoù a ziskouez splann ez eus tud sparlet en **"Emsav"** a-wechoù.

En niverenn 103 e lenner er pennad-skrid o tennañ d'ar gelaouenn nevez **"KLASK"** ur frazenn iskis a-walc'h "Tud 'zo a vez prederiet gant seurt traoù" (da laret eo doare-skrivañ ar galleg).

N'emaomp ket a-du gant seurt menozioù, tamm ebet. Da gentañ, ur gelaouenn enklask eo **"KLASK"**. Perak ne vefe ket skrivet diwar-benn doare-skrivañ ur rannyezh a vez komzet e Breizh (zoken ma z'eus kont eus Breizh-Uhel?).

Soñjal a raen e oa **Gwenael CARADEC** a-enep lenn ur pennad a-zivout ar galleg peogwir n'eo ket ur rannyezh keltiek (klaskerezh keltiek eo an danvez studiet gant **"KLASK"**).

Gallout a ran kompren zoken ma kavan gwelloc'h ledanaat a-wechoù peuriñ ar gazetenn gant ma vije termenet an diazez.

Met n'eo ket se a feuke **Gwenael CARADEC** peogwir e lar eo ken sot all studiañ doare-skrivañ ar gwenedeg. Ober a rae fae ouzh ar rannyezhoù, setu ar pennabeg. N'eus nemet un danvez a dalv ar boan da vezañ studiet : ar brezhoneg peurunvan.

N'eo ket evit tabulat gant an den-mañ-den e savan al lizher-mañ met evit lavarout ar pezh a gredan start : bez ez eus, en **"Emsav"**, tud (un nebeut tud, a laran) hag a soñj ar memes doare hag ar grezierennerion c'hall.

Cheñchit ar ger **"galleg"** gant **"brezhoneg"**, ar ger **"brezhoneg"** gant **"gwenedeg"** pe **"galleg"**. C'hwila laro din e c'hoarvez seurt traoù e pep kevredigezh. Ya, gwir eo. Ne vez disi kevredigezh pe luskad ebet. Met ne ra vad ebet d'ar brezhoneg bezañ ken sparlet hag hon enebourion.

Ma l Gant ma vovo hir ar gazetenn **"KLASK"** gant e sperad dign. Warni vo lennet ur pennad a-zivout doare-skrivañ ar gwenedeg, marse.

A wir galon ganeoc'h,

Jakez VINCENT (NAONED)

KAN DAÑS...

GOUEL BROADEL AR BREZHONEG, 1,2,3 A VIZ MEZHEVEN, KARAEZ.

Gwener 1 a viz Even

9e noz, abadennoù
en ostalerioù kêr
gant

KEMIA ha **MAOGAN**

Sadorn 2 a viz Even

SONADEG VRAS
gant
LES PIRES
GWENDAL

FEST-NOZ
gant

DIAOULED AR MENEZ
ha kanerien ha sonerien...

Sul 3 a viz Even

adalek 2 eur, abaden gant
DEN
E. V.

KREIZ T
NEW DAZONT
GLENMOR
Padrig EWEN
ARREGUIN (Gallsia)
FANFAR BRO
DREGER
Jorj JOIN

FEST-NOZ

gant
STROBINELL
Kanerien
Sonerien

Hag eveljust, prezegennoù,
staliou ar c'hevredigezhioù,
boued ...

PROSEZ

GILBERT CABON : AN TREC'H !



Yann CHOUCQ, Alvikad Gilbert ha Jean-Yves o respont da goulennoù kazetennerien "Antenne 2" e Kemper.

D'an 3 a viz Mae e oa barnet **Gilbert CABON** ha **Jean-Yves MEUDEC** e Pariz. Tamallet e oa dezhe bezañ ezel **ARB (Arme Dispac'hel Breizh)** ha kaout danvez tarzh gante pa oant bet harzhet gant ar polis e miz Even diwezhañ.

Feulster an archerien

Gwarzet mat e oa lez-varn ar 14vet kambri, deziz ar prosez : archerien a pep lec'h. Ugent den diwar an 200 bennak a emsaverien a voe degemeret er sal goude bezañ sellet pizh ouzh o faperioù ha furchet ken pizh all. **Gilbert CABON**, en toull abaoe miz **Even 89**, a vennas komz Brezhoneg evel ma 'n doa graet abaoe ar penn-kentañ. Nachet e voa dezhañ ar gwir-se, setu ma lakas an dud er sal un tamm danvez war o genoù. Ne badas ket pell, an archerien evel bleizi a skarzhas anezhe en un doare feulstire. Trouz ha kann e-maez ar sal, kement ha ma voe gloazet meur a hini, betek ma lavaras prezidantez al lez-varn d'an archerien sioulaat ha degas an dud en-dro er sal.

10 test

Dek test a oa deuet da zifenn **Gilbert CABON** ha **Jean-Yves MEUDEC**. En o zouez, **Alan STIVELL**, **Andre LAVANANT**, **Jean-Yves COZAN**, **Massimu SIMEONI**, **Annaig GARS** ha **Riwall AR MENN**. Pev ar anezhe a


Gilbert Cabon war tachenn ar yezh, o lavaret e oa tud o implijout doareoù zo rak ne oa ket tu da vont war-raok war an dachenn lezennel. **Massimu SIMEONI**, kannad Europa ha Kors anezhañ a zisplegas e oa reizh en em zifenn e Brezhoneg hervez lezennoù Europa.

An trec'h

Goude prezegen-damall prokolor ar republik a c'houlennas 16 mlz toull evit **Jean-Yves MEUDEC** ha 2 vloaz evit **Gilbert CABON**, e voe tro an alvokadad da vreaetañ : **Claire FRESSINET**, **Rafaël CONSTANT** ha **Yann CHOUCQ**. Difenn a rejont an daou emsaver war tachenn reizhder o stourm en ur ziskouez splann gwaskerezh Pobl Breizh.

D'an 31 a viz Mae e vo roet disoc'h ar prosez. Laosket e voe **Gilbert CABON** da vont er-maez an toull, koulskoude, diouzhtu goude ar prosez. Un devezh kaer evit an emsav, d'an 3 a viz Mae 90, an trec'h hag ar frankiz evit **gilbert CABON**.

Gwenael CARADEC



A-raok mont d'ar prosez eo bet staget ur banniel hag ur giton ouzh savadur " Breujoù Breizh"

BECH ADARRE !



c'hlas,
3^e e vefe kontant ar rektor gant an
eurvezhiou galleg kenteliet er
c'hlas !

E pep keñver e vez santet youll fall
ar Stad : ur baperenn diantket hag a
broue ne oa ket bet savet ar skol
kerz ar 5 bloaz diwezhañ, ha stanket
an hent da vat. Gwashoc'h 'zo : bez
e'nach ar Rektor goprañ skolaerien
skol-vamm ken, dre ma kav dezhañ
ne oa ket bet graet strivou gant
DIWAN da blantañ galleg enni !

Gant Emglev mod SEASKA e vez
gopret holl skolaerien skol vamm ha
kentañ derez hep na vefe sallet ouz
oad ar skol, niver ar vugale, nag hini
an eurvezhiou galleg, gant ma ouezo
ar skoldi galleg kement ha brezhoneg
e fin ar CM2.

War dachenn an arc'hant, ez eo ret
gouzout n'eus ket tu da ZIWAN
bevañ ken gant ar Protokol. Kreskiñ
a ra DIWAN buanoc'h eget ma vez
ret kevratou dezhañ. Yalc'had ar
Stad a ya war zigresk a vloaz da
vloaz, betek mont da get e fin ar
Protokol. M'en deus c'hoant DIWAN
da gaoz skolaerien dalvoudus, ez eo
ret goprañ anezho war memes
pazenn ha re an Deskadurezh Stad,
ha kresk JOSPIN a zo da sammañ
hep na kreske skoazell ar Stad eus
ur gwenneg toull. Gant budjed 1990,
ez eus un toull a ouzhpenn 4 milion.
N'eo ket bet renket c'hoazh kudenn
an die sokial, a ya war greskiñ ivez,
ha n'eo ket echu gant prozeziou an
URSSAF, an ASSÉDIC, hag all. Gant
an Emglev-mod SEASKA, e vefe
espernet 2,5 vilion gant DIWAN.

Stourm eta !

Evel just, pa oa bat gouezet e oa
bet sinet un Emglev gant SEASKA, e
oa bet gouennet e vefe kinniget
kement-all da ZIWAN : en aner.
Nac'hed groñs e oa bet diouzhtu.
Cheñch a ra an digareziou roet : a-
wec'hou e vez kinniget betek gortoz
miz Genver 1991, dre zivouer a
arc'hant e kef ar Stad, aliesoc'h e
vez lavaret e vo lakaet ar Protokol da
dalvezout betek ar fin. Hogen nac'h
e vez bepred.

Ha koulskoude, er bloaz-mañ,
emañ holl bolitkourien Breizh o
skoazellañ DIWAN. **KUZUL
DEPARTAMANT PENN-AR-BED** en
deus kinniget diouzhtu e vefe bodet
an holl o devoa kensinet ar Protokol
evit gouenn ma vefe torret.
Prezidant Kuzul ar Rannvro en
deus embannet e heulie an Aotrou

D'ar Gwener 30 a viz Meurzh
en em vade un nebeud kerent eus
DIWAN Bro-Leon dirak Enseldi an
Akademiezh e Brest. Ur sizhunvezh
diwezhatoc'h e oa tro re Genev da
sevel ur voger ouzh dor Enseldi
Kemper. Setu jeu adarn eus DIWAN
hag an Deskadurezh Stad. Ha tonket
eo DIWAN d'ober manifestadegoù
bep bloaz evit dont a-benn da
veañ ? Daou vloaz 'zo e oa evit
kaout ar Protokol, warlene evit ma
vefe doujet ouzh ar Protokol-se. Met
er bloaz-mañ ez eus bet cheñchet
penn d'ar vazh dre ma z'eus bet
lakaet war bleustr gant ar Stad ur
politikerezh nevez evit skolioù
minorelezhioù Bro-C'hall, nemet
skolioù DIWAN.

Un emglev nevez ...

D'ar 17 a viz Du 1989 eta e oa bet
sinet gant Rektor Akademiezh
Bourdel ha prezidant SEASKA un
Emglev (Convention) a ginning e vefe
paet holl skolaerien ar gevredigezh
(61,5 post) gant ar Stad. Ur statud a
skolaerien gevratei a vo ganto, gant
ma tremenint un amodenn evit bezañ
titlet gant ar Stad. Ouzhpenn-se e vo
savet ur Gomision 12 den enni (6 evit
an Deskadurezh Stad, 6 evit
SEASKA) hag a vo karget d'ober war-
dro ar mod da gas an Emglev en-dro,
ha da blegiñ gant stummadr ha
prizidiar ar skolaerien, palioù ar
skol ...

Nemet gant DIWAN !

bremañ 4

Penaos 'mañ kont bremañ ?

E-skoaz ar c'hudennoù-se en deus
DIWAN kalz da c'hounit diwar an
Emglev. Hiziv, gant ar Protokol, ne
vez gopret nemet 12 skolaer gant ar
Stad. Evit-se, ez eo ret :

- 1^o e vefe bet digoret ar skol
ouzhpenn 5 bloaz 'zo,
- 2^o e vefe d'an nebeutañ 15 bugel er

STOURM ADARRE !

KOZAN ha **Kuzul Penn-AR-BED** e
pep keñver. An Aotrou **POURCHET**
en deus lavaret a lakafe ar Rannvro
he holl fouezh en afer.

Liammet e vez bremañ an teulid-
mañ ouzh hini an die sokial.
Menegomp ivez memestra e oa bet
dilenndi P.S. 'zo eus Aodoù-an-Arvor
o komz eus an Emglev da dud Bariz.
Bresk eo youl tud 'zo c'hoazh, ha
n'eus ket re a startijenn enno ; n'eo
ket DIWAN c'hoazh pennañ preder an
holl, hogen anat eo ne gred hini ebet
mont a-enep da ZIWAN, ha feuket e
vez holl bolitkourien ar vro o welout e
vez nac'het ouzh Breizh ar pezh a
vez profet da Euskadi, Korsika, hag
all.

Ha bremañ ? Pesourt strategiezh a
vo dibabet evit ma vefe echu gant ar
Protokol, sinet an Emglev ha roet an
arc'hant da ZIWAN a-raok vakansoù
miz Gouere(1) ?

Da gentañ, e vo dalc'het gant
doareoù mat hengounel ar Stourm :


-Stankañ pellgomz ministred 'zo,
ha kas lizhiñ dezho(2),

klevet, met bremañ, e vo ret dezho
mont pelloc'h, hag an Ober an hini eo
a c'hortozet diganto. Dre aze e vo
savetaet DIWAN.

Kaout an Emglev, renkañ
kudennoù an die sokial, unanin an
dilenndi tro-dro da ZIWAN, setu tri fal
uhel mat ! Met kement-se a ziskouez
mat pe hent a zo bet graet a-c'houde
un 10 vloaz barnak. Aet eo
mennoziou DIWAN war-raok, hag a
galz, ha ganto ar mennoziou a-
zivout ar brezhoneg. Ret eo d'an holl,
kerent, mignoned, brezhonegerien pe
get, pouezañ evit ma vefe roet justis
da ZIWAN ha d'ar Vretoned, evit ma
chomfe bev an deskadurezh e
brezhoneg. Afer an holl eo DIWAN,
ha n'eo ket hini un nebeud tud
hepken.

(1) Ne vo ket arc'hant ken e kef
DIWAN a-benn miz Gouere. Ma
n'eus cheñchamant ebet, e vo ret
da ZIWAN padout un hanter-vloaz
hep gwenneg ebet !

(2) Bez e c'hell pep hini kemer perzh
er stourm-mañ. Setu aze un
nebeud niverennoù pellgomz a-
bouez :



-Gwelout maerod ar vro evit ma
skrivant int ivez,

-Sevel manifestadegoù lac'hel,
aloubiñ tier ar Stad (Enseldioù,
Prefetioù, Tier an tailhoù),

Ouzhpenn-se, ez eo ret mont
pelloc'h c'hoazh war-du an dilennidi.
Ret eo stankañ, startaat an
darempredoù etrezo ha DIWAN.
Labour vat a vez graet bremañ dre
vras gant an tu dehou. Gant ar
sokialourien avat, e chom labour da
ober evit ma savfent a-enep da
bolitkerezh o gouarnamant.

A-bouez bras eo e vefe unanet holl
dilennidi Breizh a-benn an 22 a viz
Mae, dez emvod kentañ ar C'huzul
Rannvro. Komzou c'hwec'h a zo bet

ROCARD : 16.1.42.75.81.81,
BERGOUNGOUX : 16.1.42.75.71.07,
pe 16.1.42.75.80.00,
GUELMANN : 16.1.42.55.36.36,
LE PENSEC : 16.1.47.83.01.23

Responñt en un doare seven
memestra ! Gouennet an Emglev
evit DIWAN. Bez' e c'hellit ivez
skrivañ da Gentañ Ministr Bro-
C'hall, pe da JOSPIN, ne gousto
netra deoc'h.

Pedet och ivez da gemer perzh e
manifestadegoù DIWAN. Evit-se,
kit e darempred gant Skol DIWAN
ho pro.

P. HERVE
(Ezel eus Burev Diwan Breizh)

**Emañ DIWAN o klask ur
Rener war ar C'helenn,
da ober war-dro
ar Stummañ
ar Bedagogiezh
an Tuta.**

**C.V. da gas da
Rener DIWAN
B.P. 22
29870 LANNILIZ
98 04 05 42**

EMAN DIWAN O KLASK

**Brezhonegerien
efedus,
Startijenn enno**

- Rener war ar C'helenn
- Stummer
- Kuzulier war ar C'helenn
- Skolaerien
(gopr skolel D.S.)
- Danvez Skolaer
(stummadur gopret)
- Implijer Burev da gevratei
(Contrat Emploi Solidarité)

Kas ul lizher hag ur C.V. da
DIWAN - Servij Implijer
B.P. 22 29870 LANNILIZ

Diwan Sant-Nazer

Kuzul Soazell Diwan Sant-Nazer ha Bro-
Werrann a zo e soñj digeriñ un eil skol
Diwan e Bro-Naoned.

Pedet eo an holl re a fell dezho sikour ar
skol-se da skrivañ pe da bellgomz da
**Yann JAMERON, 34 stradaed Claude
Bernard, 44800 SAINT NAZER
(40 53 12 49).**

Emvod d'ar Gwener 11 a viz Mae
da eizh eur hanter. Ti ar Bobl,
gant Herve KERRAIN a gomzo eus
DIWAN hag eus an doareoù-
kelenn lakaet e pleustr er
skolioù.

bremañ 5

**KELEIER
INSEE / YEZH**

**ALOUBIÑ TI AN
INSEE**

D'ar Gwener 13 a viz Ebrel e voe aloubet burevioù an INSEE e Roazon gant ur pemzek bennak a dud eus Stourm ar Brezhoneg a viras ouzh rener rannvro an aozadur-se da vont kuit e-pad 3 eurvezh. Gant an taol-se e felle da Stourm ar Brezhoneg adembann ne c'hell ket degemer niveridigezh poblañs ar Stad C'hall, graet gant an INSEE, a ra fae war ar vrezhonegerien. An devezh war-lerc'h e ambannas kezelennoù gall zo komzoù L. LAURENT, rener an INSEE e Roazon: "ne gomprene ket", emezañ, "e vefe bet taget-efi, a zo a-du gant ar brezhoneg".

Sklair eo koulskoude: keit ha ne baouezo ket ar Stad C'hall gant he folitikererezh a-enep ar brezhoneg e c'hello ar gardidi, forzh, petore mennozhioù a vije ganto a-hend-all, gwelet difannerien ar brezhoneg o'n em sevel dirazo, n'eo ket evit o zagañ met evit ar Stad-se.

An Aotrou Laurent ne oar ket c'hoazh penaos e vo graet "an enklask bras" war ar brezhoneg prometel gant ar Ministr BEREGOVOY evit 1991. Rak ne ouezer ket piv a baed: ar stad C'hall pe Rannvro "Breizh"?

Un dra all hor boa klevet digant an Aotrou Laurent: ne vo graet prosez ebet d'an dud o deus nac'het respont da c'houlennadeg an INSEE. Parak? Re a dud a vije kaset dirak al lezioù-brud?

I. KADORED

FROUEZH AR BOIKOT

Un tamm muioc'h a evezh zo bet taolet ouzh ar brezhoneg hag an emsav sevenadurel gant an ton roet d'an niveridigezh-poblañs: kaoz zo bet eus hon boikot en holl chadennoù skinwel, gallet hon eus tamall politikerezh enepbrezhonek ar stad ha tizhout un toullad mat a dud e Breizh.

Koulskoude, gant un tamm muioc'h a unaniezh hag a breder e vefe bet tu moarvat d'ober gwelloc'h, ha godisat bravoc'h labour an INSEE, benveg ar stad-machom. Gwech ebet c'hoazh ne oa bet lakaet kement en arvar a bep tu sirusted e labour: frouezh pennegezh lod eus an emsav e oa.

War an dachenn bolitikel e vefe bet tu da ziskleriañ pegen brein sistem ar skoazell-arc'hant roet gant ar stad (gant hon gwennaen): sur e vijemp bet seloaout ma vije bet implijet an arguzenn-se gant an emsav e-lec'h pleg'h ken aes da reolenn ur c'hoari savet e Paris, raket o dije an dilennidi dibab o zu neuze, ha ne vije ket bet ur fall evit an demokratelezh.

A-benn eizh vloaz e vo tu d'ober gwelloc'h. Ma'n em gemer arbed.

L.M.

* Nac'het en doa Laorañs BELLEGO, un alread o studiñ e Roazon, reiñ en-dro e foliennoù-enklask, en abeg d'an doareoù implijet gant kêr roazon da gavout 200 000 annezad. Klenn ebet a-berzh kêr: faos eo ar sifroù dija?

DESKADUREZH

Lise "CHARLES DE GAULLE" eo anv lise nevez Gwened, e Menimur. Mardi eo diwar anv ar "Barzh a Vro C'hall" a feu, e tefe bezañ bravoc'h lec'h kelenn ar brezhoneg ennañ eget el lise all.

(Notenn: Charles Jules Joseph De Gaulle, Paris 1837-1880 Paris, a voe sekretour "Breuziezh Breiz", ha goureotr ur jeneral brudet.)

**Divyezhegezh er
skolioù-stad: kendiviz
e miz Here.**

Emañ an APEEB(1), ezel eus ar gevredigezh FLAREP(2) o vont da sevel ur c'hendiviz diwar-benn "ar yezhoù-rannvro hag ar liesyezhegezh" er skolioù-stad e miz Here.

Fellout a ra d'an APEEB reiñ da anavezout "kelenn ar yezhoù rannvro er skolioù-stad (140 000 skoliad e 1987)"; goulenñ digant an Deskadurezh-stad sevel ur gwir bolitikererezh evit diorran ar c'helennererezh-se, dreist-holl dre stummadur ar gelennerien; lakaat an dilennidi da bledañ gant ar gudenn a-benn ar fin; ha lakaat an holl da brederiañ diwar-benn talvoudegezh kelenn ar yezhoù-rannvro (e Breizh, kelenn ar brezhoneg) war drezoù ar c'hentañ kantved warn-ugent.

E Douarnenez e tefe ar c'hendiviz c'hoarvezout, d'ar 27 hag 28 a viz Here.

Evit gouzout hiroc'h e c'haller skrivañ da Yann-Erwan BROUDIG, 35 straed Vasselot, 35000 ROAZHON.

M.K.

(1) - APEEB: Association des Parents d'Élèves pour l'Enseignement du Breton, BP 2507 35025 ROAZHON

(2) - FLAREP: Fédération pour les Langues Régionales dans l'Enseignement Public

KEIT VIMP BEV 10 vloaz dija!
evit lidañ an deiz-ha-bloaz

- 1 B.D. evit netra
- + 1 Pep tra HANTER BRIZ
- + 1 PROF (skritell, pegsun...)
- + Sinadurioù

e **KARAËZ**, d'an 03/06/90

**PEVARE NIVERIDIGEZH POBLAÑS
e bro Sina**

**Deroù a-benn an deiz
kentañ a viz gouhere**

Darbaroù pevare niveridigezh poblañs Bro-Sina zo bet kroget e maezioù ha kêrioù ar vro en he fezh. Ledander hag hirder skeul an niveridigezh-se a laka anezhi da vezañ dibar en istor. Abalamour d'ober enklaskoù diazezet mat ha da ziwall d'ober mankoù bras a enskrivadur ar poblañs e ranko stummadur an niveridigezh bezañ peurachuet arak diwez miz Mae. Evit c'hoazh eo achu an taolioù-arnod sondadur. Tachenn ar sondadurioù-se en em lede war ouzhpenn daou vilion a dud hag ezhomm a oa bet eus 50 mil kargad. Priest eo frammadur an niveridigezh e livoù ar Stad, ar Proviñsoù, ar c'harioù hag ar Bannoù met n'eo bet stummet nemet 80% eus ar frammadur war ar maezioù hag er c'harterioù. Hervez disklariaurioù zo e vo ezhomm eus ouzhpenn ur milion a dud-e-karg evit pep live frammadur an niveridigezh, 6 milion enklasker mui ouzhpenn ur milion a Reteradour, Kuzulier, Kontour.

Kudenn an niveridigezh a vo kresk fiñvusted ar poblañs ha "disentidigezh ouzh diawel ar Steuñvekaad-Tiegezh".

Strollad-Ren an Niveridigezh Vroadel, Kengor ar Steuñvekaad-Tiegezh ha Burev ar Surentez o deus

bodet o zitourou abalamour da enskrivañ an-araok an dud o deus muioc'h a vugale eget an niver a vez gouroc'h emennet gant ar Steuñvekaad-Tiegezh hag abalamour d'ober ur rentañ-kont diwar-benn ar poblañs divonedus: e-giz-se e vo nebeutoc'h a labour a-benn ar tañ a viz Gouhere.

**Politikererezh
demografek Bro-Sina**

E c'hellomp lavaret n'eo nemet azalek 1979 ez eus ur politikerezh demografek e Bro-Sina. Gant an niveridigezh kentañ e miz Du 1954 e voe kontet 583 milion annezad e Sina ha gant hini 1982 e voe kontet 1 miliard 80 milion anezho!

**Azalek 1979:
trema ur c'hresk a 0%?**

Maizet eo bet e oa bramanadur Sina diaesoc'h c'hoazh trapenn da niver a annezidi ha Mistri nevez ar vro o deus marzet e oa kreñvaat frammadur Steuñvekaad ar Ganedigezhioù: HUA GUO Feng a zisklerias e 1979 e vo ret da lez ar Gredidigezh diakenn betek 0,5% e 1985 ha betek 0% e bloavezh 2000. Ret eo kaout ur bugel nemetken ha n'eo ket mui kendrechiñ pe tamall an dud a vo graet met ober dre dalvoudegezhioù an tiegezhioù: ar c'hoabladou unvugleik a heuilh reolennou enepganadurezh a c'hounez roadoù


miziek betek ar 14vet bloaz ar bugel e kêr hag ul lodennad boued mui ul lodennad tachenn gounid prevez, war ar maez. War ar marc'had e vez roet d'ar familhoù-se roadoù-lojez, louzoù ha skoladur d'o bugale evit netra.

Evijust, ober hag efadusted ar politikerezh-se zo hervezh gallusted al lec'hioù hag a c'hell bezañ dishevel-kaer d'an eil rannvroioù d'ar re all ha dreist-holl e rannvroioù "ar minorelezhioù broadel" rak n'eo ket arvarus c'hoazh evit Bro-Sina "four-ganedigezhioù" ar minorelezhioù. N'eo poblañs ar minorelezhioù nemet un 8% eus poblañs Bro-Sina!

Ur c'hemm bras zo etre ar c'harioù hag ar maezioù: aze eo miret hengoun ar c'hanadurezh: ar gouerien n'o deus ket a leve-kozhni; neuze eo ret kaout mibien evit ober war o zro e diwezh o buhezioù: ar marc'had a ya kuit da di o gwazed. Neuze e vez ganet bugale ken a vo ur mab. Hag ouzhpenn-se an deus an atizadur-danvez nebeutoc'h a dalvoudegezh war ar maez eget e kêr.

Hag e veizer skoulm bras Steuñvekaad ar Ganedigezhioù pa ouezer eo 60% poblañs Sina yaouankoc'h eget 25 bloaz hag ez eus 250 000 000 maouez en oad da c'helloc'h krouadurien (etre 15 ha 50 bloaz)!

Yann-Varch THOREL



POLITIKEREZH

MITTERRAND :
"plegit Lituaniaz !"



Lambertis. Ha c'hoant en deus an Aotrou MITTERRAND degas da soñj dimp komzoù e yaouankiz da vare penn kentañ brezel Aljeria, pa embanne "L'Algérie c'est la France !" ?

Loeiz MAHE

* Sevel a ra UDB a-enep da ziskleriadur KOHL ha MITTERRAND. A-hend-all, siwazh, n'eus bet manifestadeg ebet e Breizh da zifenn gwirioù pobl Lituania.

POLITIKEREZH
CONSEO

D'an 21 ha 22 e oa EMGANN o tegemer e Naoned dileuridi CONSEO, a-raok ar Vodadeg Veur a vo dalc'het e Barcelona d'ar 25, 26 ha 27 a viz Mae 1980.

Kelaouiñ...

D'an 20 a viz C'hwevrer e oa bet roet da Ber DENEZ ar priz "Ramon LLULL", e Barcelona. Eizhteze war-lerc'h e oa bet kaset ar c'heloù gant UGB d'ar c'hazetennoù, AFP, skingomz hag all. En abadenn sizhuniek Radio Anvorig, gant Mikael BAUDU, e voe bet embannet ar c'heloù kerkent. E QUEST-FRANCE eo bet embannet ar c'heloù d'ar 24... a viz Ebrel ! Se zo Kelaouiñ !

En o emgav diwezhañ o deus MITTERRAND ha KOHL embannet un diskleriadur a c'houlennt emañ digant gouarnamant Lituania dont en-dro war embann dizalc'hted Lituania graet gant breudoù ar vro, dilennet en un doare demokratel. Ken kustum eo Fañch MITT da larout da Gambir Paris petra o deus d'ober ma kred e c'hallio dont a-benn ken aes gant Lituaniaz.

Ha mar-dre ret lavarout da Lituaniaz diwall ha bezañ war evezh, perak ne lavar ket ivez penn ar stad c'hall eo reizh d'ar vro-se adkavout an dizalc'hted a oa bet lamet diganti gant Stalin en un doare heugus, hag eo ret d'ar rusian Gorbachev diwall diouzh ar pezh a oa a-enep da Lituania ?

Penn ar stad c'hall, bras e c'henoù gant gerioù a-zivout difenn gwir ar pobloù, ha diste e oberoù war an dachenn-se, a seblant en em santout tostoc'h ouzh gwarker ar gwirioù-se, Gorbachev, eget ouzh o difenner

Met penaos eta e c'hall penn ur stad n'en doa biskoazh anavezet stagidigezh Lituania (hag an div vro val' all) goulennt digant Lituania paeuz a ziskleriañ eo dizalc'h o bro ?



stourm

KATALONIA

EUSKAL HERRIAN
EUSKARAZ

Evit ar c'hapes

D'al Lun 9 a viz Ebrel e oa bodadeg veur gant stourmerien evit ar c'hapes katalanek e Perpinyà. Diskuliet en doa Joan BECAT, en anv "Mignoned ar Studioù katalanek er Skol-Veur", anvioù an eizh enebour o doa war o hent : an eizh enebour o doa war o hent : Lionel JOSPIN, ar ministr a "lez an traoù da vont"; Claude ALEGRE, e guzulier ispisial, "enebet-krenn da Berpinyà"; GELMANN ha GEOFFROY, an eil o c'h ober war-dro an darempredoù gant ar Parlamant hag agile arbennigour teknikel, "a zalc'h an teulad en o daouarnioù"; RIOT, rann bras al lisoù, "enebet d'an holl gCapasoù bihan". Ouzhpenn-se, emazañ, emañ Rector Akademiezh Montpellier, an Aotrou

dud e rak rag "int-i a vo kaoz ma ne c'hounezomp ket ar c'h-Capes".

Divezhegezh, nann !

Gant an ACE (Associació Catalana d'Estudiants) e oa bet goulet ouzh Skol Veur Perpinyà ma vije laket skritelioù divezhek (katalanek ha galleg) e savadurioù ar skol-veur ; nac'het eo bet o goulenn.

Klammel o deus ivez tud an ACE dre ma oa bet nac'het ober war-dro ul lizher katalanek er skol-veur.

Votet he deus ar skol-veur a-enep degemer lizhiri "en ur yezh estregel ar galleg" dre ma z'eo ur melestradur

EHE : stourm an euskareg

Krouet eo bet ar strollad EUSKAL HERRIAN EUSKARAZ (d'a lavarout eo ger evit ger : "En Euskadi, en euskareg") e miz Mezheven 1989. "Euskareg, yezh ofisiel" setu barr-ha-barr pal ar gevredigezh nevez-se.

Ur strollad all c'hoazh a lavarit marteze ; ha da ober petra ?

Ya, ret eo lavarout e kaver en Euskadi an Hanternoz meur a strollad a gemer pezh er stourm evit difenn ar yezh : SEASKA, AEK, hag all... E-pad ar bloavezhioù diwezhañ o deus pouezet ar c'hevredigezhioù-se war an deskadurezh (pezh a zo talvoudus, anat eo) daoust ma oa an euskareg en ur stad skoudik a-walc'h war an dachenn politikel ha sokial.

Enklask ar SIADeco a ziskouez mat pegen fall eo stad ar yezh en tumañ eus ar menezioù (re nebeut a dud yaouank a ra gant an euskareg).

Setu n'eo ket EHE ur strollad sevenadurel ; ur strollad politikel eo kentoc'h. A-hend all e vez lavaret gant EHE eo engouestl ar galoud ha lusk ar bobl an daou dra bouezusañ evit adkavout ar yezh. An daou dra a zo liammet ha pa vez ledan an emsav poblek e rank ar stad reiñ un draig bennek. War e vano, eo rat sevel ha kreñvaat an emsav-se. Ha petra o deus graet ar strollad betek-hen ?

En euskareg eo bet skrivet staturd ar gevredigezh ha kaset d'an isprellet. Kudennoù a zo bet moarvat.

Ur brezagenn dirak ar gelaouennierien a zo bet savet ivez - en euskareg dalc'hmata. Gant tabut evel ma c'hellit krediñ.

Ur bern lizhiri a zo bet kaset gant tud EHE d'an tiez-bank, stalioù bras hag all... evit displegañ dezho petra eo pal ar strollad ha goulennt diganto bezañ prest da reiñ menozioù evit gwellaat stad ar yezh.

TOUTLEMONDE : Ensaller Perpinyà, an Aotrou DARRAS "en deus lavaret eo oa a-walc'h a bastoù..." hag a ra ar pezh a c'hell da zigreskiñ ar c'helenn katalanek, hag ar Prefed Roger GROS, "ur pezikopat na daouez ket da skrivañ da Barz diwar-benn dañjer Katalonia ha hini ar c'hatalanek e Katalonia an Hanternoz".

Evit ar c'hevredad Difenn ar C'hatalanek eo anat ez eus "ur politikerezh a-enep d'ar c'helenn katalanek, renet gant ur spered sot ha warlec'hiet".

Goude ar c'homzoù flour-se e voe divizet "broudañ an dilennidi" da finval ha da vont da welout an holl

gall, daoust ma tegemer lizhiri e yezhoù a bep seurt, katalanek ivez, eus Andorra da vihanañ.

Evit dilennidi an ACE e kuzul ar skol-veur ez eus amañ ur skwer splann a zroukziforc'herazh hag en sell emaint da glemm dirak lezvarn ar velestradurezh.

Ur gumun hepken

Fellout a ra da vaered Portbou ha Cervera e vefe unvanet o div gumun, a bep tu da harzoù-stad Spagn ha Bro-C'hall, gant ur skol hepken, e katalanek aveljust, ha spagnoleg pe galleg goude da zibab.



EUSKADI

Bremañ eo rannet EHE e daou strollad-labour. An hini kentañ a zo karget da bouezañ war ar stad c'hall ha war an dud (hervez al lezenn bapred) evit ma vefe implijet an euskareg er vuhez foran. An hini all a ra war-dro ar panelloù-hent. Ret eo lavarout memestra n'eo ket re unvan ar strollad EHE (nag an emsav euskarek dre vras, en hanternoz d'an nebeutañ) evit dibab ur stourm resis. Ar pezh a zo bet graet e Breizh gant SAB a zo bet degemeret mat-tre amañ, mat dre ma eo deuet da vezañ niverus ha diunvan ar strollad, n'eus ket bet divizet tra ebet (betek-hen), evit ar panelloù.

Daoust hag-ehñ e vo gwelet panelloù livet war vord an hentoù ?

En tu all d'ar stêr Bidassoa evel ma lavarer, o deus kroget an Euskariz da livañ an anvioù spagnolek war ar panelloù divyezhek ...

Yves-Marie MOAL

Kelaouiñ

Pa skriv "Le Monde" diwar-benn darvoudoù Euskadi e oar mont da glask e geleier gant ar boliserien, re Vadrid evel re Paris, ar re nemeto a c'haller kaout fiziñs enno.

Ha setu perak, en ur pennad kensinet gant Philippe BROGGIO (brudet e Korsika evit e labour e servij ar bolis) ha Philippe ETCHEVERRY (bet o labourat gwachall gant "Enbata") d'ar bevarzek a viz Ebrel, ez eus bet klasket louzañ ar muiañ ar gwellañ ar stourmerien nevez harzet en Euskadi.

Tamm kaoz ebet eus ar jahinerezh gouzavet gant Unai PAROT, e-pad 5 devezh etre daouarn ar "Guardia Civil". Er memes niverenn eus "Le Monde" e oa ur pennad-stur diwar-benn afer Katyn ha "dismant" ar gevier !

Aberri Eguna

40 000 a dud a oa o vanifestiñ e Kâr Iruñea da Sul Fask evit an Aberri Eguna, dewezh Bro-Euskadi, galvet ma oant gant Herri Batasuna. Goude ar prezegennoù e yezh ar vro e voe klevet re e gouezelag gant dilouriad ar Sinn Fein hag e korseg gant Yves STELLA (A Cuncoita). Gant bannieloù Euskadi ha Litunia. Tra ma veze gwelet ivez bannieloù Breizh, Katalonia, Gallsia, h.a.

Goullenn a reas an aozerien, en emgav gant ar gazetennerien, ma vefe adkroget an divizoù etre ETA hag ar stad spagnol.

1 500 a dud a oa en Hendaia o lidañ ivez an Aberri Eguna. Kerzhet e voe betek ar pont "etrevoadel" ha bech a voe eno gant ar CRSe.

BREIZH

JUSTIS

Prosez e Caen

D'ar 25 a viz Ebrel e oa kondaonet gant Lez-varn Engalv Caen an emsaver Herve BARRY, eus Foujera, da 4 miz bac'h gant goursezh ha 2000 lur a dell-justiz, evit bezañ livet panelloù e 1983, en dro da Roazhon. Goude ar prosez kentañ, hag an engalv e oa bet kaset an afer d'al Lez-terriñ barn, da Bariz, dre ma veze nac'het bep tro ouz Herve BARRY ar gwir da gomz brezhoneg : al lez-terriñ a zivizas kas an afer da gCaen !

Dre ma z'eo bet nac'het ar memes gwir outañ e Normandi evel e Breizh e tegouezho an afer dirak al Lez-terriñ-barn, n'eus ket mall gant an dud.

KORSIKA : panelloù



Panelloù nevez-flamm zo bet taolet e porzh Bastia gant emsaverien eus an UPC (Unione di u Populu Corsu) en o fenn Max SIMEONI, kannad

europat : "Reizh eo stourm evit ma kloto an anvioù-lechioù gant sevenadur Korsika", emezañ. E soñj sevel klemm e oa an departamant da c'houde.

GWASKEREZH, PETRA NEVEZ ?



N'emañ ket mui ar stourmer euskarat Filipe BIDART en ur gell e-unan-penn abaoe ar sizhun tremenet. 25 miz zo bet ret d'ar justis sokialour gall a-raok kregiñ gant seveniñ un nebeudig gwirioù Mab-Den war ar poent-se. Ken gwan en em gav ar stad c'hall ma rank diskar ar stourmerien en o c'hoñ hag en o fersonelazh. Diskar youl ur bobl en he fezh zo un afer all ! Ar 1500 den bodet e straedoù Baiona d'an 31 a viz Meurzh evit difenn un den diskouezet a-viskoazh gant ar mediaoù evel un torfedour eus ar re washañ a ro da c'houzout splann d'ar jahinerien a bep tu pelec'h emañ an nerzh hag ar youl dibleg. Ur gentel evidomp holl ivez.

Ur gentel ha n'eo ket bet intentet evit c'hoazh gant mevelien ar stadoù gall ha spagnolat. Na gant ar mediaoù ! Safar ha talabao zo bet aozet war holl chadennoù ar skinwel evit kemenn d'an holl e oa bet paket ur vandannad "gallaoued" a vije kiriek eus n'ouspet muntre e "Bro Spagn", e anv ETA. An emsaverien euskarat o-unan o doe aon rak ar vuntremen-se, ar "gelacuennierien", int, n'o devez ket aon rak ar gwashañ gevier ! Ur vandannad a lavaren, rak, digorit bras ho taoulagad, ne oa ket

stourmerien anezho, nann avat, met torfedourien a vicher gopret gant ETA ! Ha da reiñ sifroù : etre 5000 ha 10 000 lur. C'hwil a lavaro ne oant ket paet mat evito da vezañ bet ken efedus war an dachenn. Speredoù fall achanoñ ! Ar pezh a gont eo : siliñ brud fall ha dispiz war an holl vroadelourien obarant ha lakaat da grediñ emañ ETA en ur stad ken izel ma rank-hi goprañ tud evit kas he oberezhioù a-benn.

Cholori bras eta tro-dro d'ar muntrou "anzavel" gant Unai PAROT. Nebeutoc'h avat diwar-benn an doare n'eo bet goullennataet hemañ gant an enklaskerien spagnolat ha gall. Ne rafe ket naet e-barzh taolenn espar an demokratelezh yaouank a vez livet deomp ingal, ne glotte ket gwail vat ivez gant brud holivedel ar Frans, bro c'hendik gwirioù Mab-Den. Hervez e c'hoar hag he deus gallet e welet ur pennadig e Karrabanchel, ez eo chomet Unai PAROT 8 devezh etre daouarn ar boliserien. Eret gant ur roched-nerzh evit mirout outañ d'an em zifenn ouz an taolioù, stlejet dre e vlev, bazhataet dez ha noz, paket e benn en ur sach, graet pikadennoù dezhañ dre 2 wech (gant peseurt danvez ?), betek samplañ. Anzavet en deus. Iskis, neketa ?

P'en deus bet Unai tro da welet ur barnet hag ur vruataerez e oa en ur stad ken mantrus ha m'en deus kredet e oa un trap aozet gant ar boliserien. Ne grede ket e oa ur vruataerez da vat dirazañ. He c'hoar n'he deus ket anavezet anezhañ diouzhtu. N'en doa ket kouset abaoe eizhtez hag herveze e oa Unai evel ur "sach" goullot. Hervez ar c'hannad gall e Madrid e oa bet un den e-karg eus ar c'hannati o'h ewezhiañ diehan ouzh yec'hed ar prizoniañ. Hag evel just "n'eus ket a jahinerezh e Bro Spagn rak n'emaomp ket en trede bed". Bezomp diarvar eta !

8 den all zo bet harzhet en Iparade ha kasat da Bariz; Ho pazit ar vadelañ da soñjal ez eus er maramañ 28 stourmer euskarat o vrainañ e meur a doull-bach, darn e Pariz, darn strewet e Bro-C'hall.

Ha dreistholl n'ankouañ ket, ur vroadelouriezh a-zoare a zo e rater an Europa, hag unan all, dinatur ha difeson, er c'hornog. Setu ni Bretoned, emamp hag e vimp bredeur milliget an Euskariz, dalc'homp soñj !

M.B.

SEVENADUR

AN "8" BRAS E ROAZHON

1987

Budjet 1987 an Eizh Bras kinniget en teuliad-se a roe an titouroù-mañ :

Dispignoù :
Kargoù evit mont war-raok 8,6 ML
Goprou, kargoù sokial..... 10,9 ML
Kargoù Monidigezh..... 5,5 ML
En holl..... 25,0 ML

Gounidoù :
Gwerzhioù 10,1 ML
Yalc'had Roazhon 7,7 ML

Yalc'had stad 7,2 ML
En holl..... 25,0 ML

An dispignoù a dalv ar gounidoù met chom a ra ur vank arc'hant dastumet war ar bloavezhioù tremenet.

1988

E penn kentañ 1988 ar vank arc'hant a dalv 3,4 ML. Stoufañ a ra Ti-Kêr Roazhon ul lodenn vat o votin ur yalc'had dreist-ordinal (ne vo ket ar wech kentañ). Chom a ra neuze 1,4 ML da stoufañ. Titour ebet mod all diwar-benn ar bloavezh-se. Met e penn kentañ 1989, goulnenn a ra an Eizh Bras da d-Ti-Kêr Roazhon da gretat un amprest a denn 6 ML. Tu zo da lar neuze n'eo ket bet tremenet mat ar bloavezh.

1989

Sammad ar budjet 1989 a zo 34 ML. Linenn ar goprou a zo 16 ML. Setu pezh a zesker ar bloavezh-se.

1990

Budjet rakwel 1990 a zo anavezet en e limernoù bras. An dispignoù a dalvezo ar gounidoù sur.

Kontet e vez gant 3 ML a werzhioù war an abadennoù, 7,5 ML a yalc'had stad ha 9,6 ML a yalc'had Roazhon. Ne velle mul dispignet nemet 6,4 ML evit ar goprou.

Goulennoù eun

Perak ez eus bet ur c'hresk a 47% eus sammad ar goprou en ur ober 2 vloaz (10,9 ML e 1987, 16 ML e 1989) ?



Serret eo bet dor ar sal "UBU" d'an 30 a viz Meurzh diwezhañ. Ar sal UBU, gant ar gouel "Transmusicales" a ro da gêr Roazhon he brud-vat e-keñver "rock", e Breizh hag e lec'h all. Staget eo ouzh an Eizh Bras ("Grand Huit" e galleg), anv Ti Sevenadur Roazhon. Ar sal UBU, e giz binviou sevenadurel all e Roazhon, a bae evit mererezh souezhus an Eizh Bras.

Goulnennet ez eus bet gant an Aotrou HERVE, Maer Roazhon, un enklask war mererezh an Eizh Bras ouzh ar "Fiduciaire de France" e miz Mezheven 1989. E miz Du 1989, rentañ kont an enklask : un toull a 23,6 ML.

Ti-Kêr Roazhon a gemer neuze divizoù strizh : 36 den diwar 68 a zo skarzhet, n'eo ket bet ad-sinet kontrad rener an Eizh Bras, Pierre

DEBAUCHE, d'ar 1añ a viz Genver 1990.

Votin a ra kuzul-kêr Roazhon, d'ar 16 a viz Genver 1990, 36 ML a yalc'hadoù ivez :

- ar yalc'had dreist-ordinal a 22,2 ML evit stoufañ an toull,
- ar yalc'had dreist-ordinal a 4,3 ML evit an dud skarzhet,
- ar yalc'had ordinal 1990 a 9,6 ML.

Penaos emañ deuet traou d'ar stad-mañ ? Ne vo ket tu deomp respont rak n'hon eus ket bet skeudenn an enklask na dielloù konterezh an Eizh Bras. Met gant un nebeut titouroù eus Ouest-France hag an teuliad "Le Grand Huit, Esquisse d'un plan de développement 1989, 1990, 1991" ez eus tu d'ober notennoù ha goulennoù.

KELEIER

BERR HA BERR

SKINGOMZ


Abadenn en arvar ?

D'ar Sadorn 28 a viz Ebrel ne oa ket bet klevet abadenn vrezhonek sizhuniek Radio-Arvorig, eus kreisteiz da ziv eur.

D'ar re o doa pellgomzet da c'houzout perak e oa bet respontet e oa abalamour ma oa bet kuitaet an ti gant Mikael BAUDU, a gimnige bep sizhun un abadenn eus ar re blijsañ (Ya ! ya !) "Du-mañ, du-hont", (un abadenn guzh ouzhpenn, peogwir ne veze gwech ebet brudet gant Radio-Arvorig e-kichen skingasadurioù all ar chadenn). Ar seurt digarez avat ne c'hallomp ket degemer e pap doare.

Garvel a ra SAB an holl selaeurien da skrivañ, da bellgomz, ha lakaat an dilennidi da glemm diwar-benn an taol fall-nevze-se a vez graet d'hon yezh. Lizhiri-skwer a c'haller goulnenn digant Bremañ.

Radio Arvorig, ball Janv'ler
35000 Roazhon Pg
99 35 18 00



AR GALLEGVA

"A-dra-sur e vo bec'h da c'houit ur statud evit ar brezhoneg. Tud e karg 'zo, desket bras war a lavarer, n'ouzont ket ez eus anezhañ c'hoazh". Setu ar pezh a embann Alain DECAUX, ministr ar gallegva, e-barzh niverenn miz Ebrel ar gelaouenn "SELECTION".

"Kemeret e oa bet divizoù (e-karz emvod Kebeg) evit skoazellañ an embann e galleg, met ivez evit skoazellañ ar sevenadurioù hag ar yezhoù rannvroel. N'emañ tamm ebet en hor soñj labourat evit plantañ ar galleg e-pep lec'h pa n'eo nemet ul lennegouriezh pe ur benveg boutin etrezomp. Ouzhpenn-se n'eus nemet Bro-Frañs ha priñselezh Monaco evel broioù unyezhek er gallegva."

Paol AR MEUR

AR RE C'HLAS HAG AN EMSAV

Da gefiver kendiviz ar 25 a viz Meurzh, en Oriant, diwar-benn "Breizh, hec'h istor hag he dazont", aozet gant ar Re C'hlas, e oa bet klozet an divizoù gant kaoz eus kenlabour etre ar Re C'hlas hag ar "Rannvroelourien" war dachenn ar yezh hag anaoudegezh an istor, hag evit difenn an endro.

Strivañ a fell d'ar Re C'hlas ober ivez evit reiñ d'an dilennadeg rannvroel ur pouez brasoc'h en dazont.

NEVEZ!

Deuet eo er-maez GERIAOUEG AN ISTOR - GEOGRAFIEZH - EKONOMIEZH!

Embannet eo gant Eil Derezh DIWAN. Un eil embannadur kresket eo. Diviet e oa bet diouztu embannadur 1añ ar geriaoueg-mañ. Ur benveg talvoudus ha ret d'an holl! Aes da implij!

40 lur an tamm. Skrivañ da Embannadurioù Diwan 29214 TREGLONOU, gant ur c'henn 40 lur +10 lur mizou-kas.

Geriaouegoù all:
-Skiantoù an Natur,
-Sportoù,
-Matematik,
-Fizik,
-Diellennadur lennegel ha yezhadur.
30 lur an tamm!

SKINWEL

D'ar Sul 29 a viz Ebrel ne oa ket bet "Chadenn ar Vro" war FR3, goude "An Taol Lagad" evel da gustum, en abeg d'ur match tennis.

Evel ma z'eus ur bern matchoù tennis da zont e vefe tu d'ar re a ra war-dro an abadenñ mont da gazetennerien sport.

D'an arvesterien ne vefent ket plijet gant an tennis e-lec'h ar brezhoneg e-ch all SAB skrivañ da FR3 da glemm pe pellgomz.

ABADENN DAÑS diwar-benn



SOAZ JOLIVET hag ALINE AR FUR e ti IVONA MARZHIN

E-doug an hañv e vo gouestlet un abadenn-dañs da **Anjela DUVAL** gant **Tamm-Kreiz/Skol Dañs Bro ar Vigoudenned**. Evit gouzout hiroc'h omp aet da welet ar renervez, **Soaz JOLIVET**.

BREMAÑ: Penaos ha perak eo deuet ar soñj deoc'h eus an abadenn-mañ ?

Soaz JOLIVET: Bloavezhioù 'zo e anavezaz Anjela DUVAL hag ar soñj d'ober un dra bennak diwar he fenn zo deuet din tamm-ha-tamm. Da benn kentañ e plij din kalz ar vaouez-se. Me 'gav din eo ur vaouez dreist-e ordinal. Pa 'meus lennet he obererezh, 'm eus soñjet e vefe a-bouez ha dedennus-tre sevel un abadenn diwar-benn he buhez hag he barzhonegoù. Mil bennozh Doue a lavaran d'an Itron **IVONA MARZHIN** eus Brest evit ar pezh he deus desket doomp war he mignonez kozh Anjela DUVAL.

Tair daolenn a vo en abadenn.

An hini gentañ gouestlet d'he bugaleaj etre he zad hag he mamm. Ar pezh hon eus c'hoant diskouez d'an dud eo an darempred he doa gant he zad ha dreist-holl penaos en deus roet dazhi he zad karantez evit an natur. Me 'soñj din e teu feiz Anjela evit an aotrou Doue eus he c'harantez evit an natur.

An eil daolenn 'vo gouestlet d'he amzer plac'h yaouank pa oa deuet he

zud da vezañ kozh hag o doa ezhomm outi evit ober war-dro an tiffirm. Echuiñ a ray al lod-se gant marv he zud. An trede daolenn 'vo war he digenvez war-lerc'h marv he zud. Penaos he deus labourat kalet war an dachenn evit disoñjal he foan ha penaos eo deuet tamm ha tamm

da skrivañ barzhonegoù hag ivez penaos he deus kavet sikour bras gant ar Brezhoneg.

B: Daoust hag-eñ eo a-vicher an dañsourezed ? Pe oad int ?

S.J: Neus nemet me hag **Aline AR FUR** zo dañsourezed a-vicher. Ar re all zo e skol ganeomp. Ar re a ray an abadenn "Anjela" ganeomp zo etre 18 hag 20 vloaz. Bez 'vo ivez div blac'hig 12 vloaz. Mod all e reomp abadennoù dañs alies a-walc'h gant an holl skolidi (oadet a 3 bloaz betek tregont ha muioc'h).

B: Penaos eo bet savet ho skol-dañs ?

S.J: O labourat e oan en ur skol vuzik. Kudennoù 'm boa evit ober ma labour e-giz 'm boa c'hoant, ha dreist-holl evit mont war-raok. Setu, goude daou vloaz er skol-se, on aet kuit ha krouet 'm eus ur gevredigezh all gant tud ar skolidi a heuilhe ma c'hentelioù. Krouet 'm boa gant 200 bugel e 1984 ha bremañ zo 550 evit div gelennervez.

B: Petra a fell deoc'h degas ouzhpenn ar skolioù dañs all ?

S.J: Desket hon eus an dañs



DANSOREZED SKOL DANS B.A.V.

Anjela Duval

ritmik hag an dañs a-vremañ. C'hoant hon eus implij an doare-se evit lakaat ar vugale da vezañ mat en o c'horf hag en o spered. Diskouez a reomp dezhe eo posubl bevañ kultur Breizh dre an dañs modern.

(krouet warlene) war porzh Keriti e Penmarch d'ar 5 a viz Eost. Kontañ a ra an abadenn-se buhez ar varlooded hag o familh.

Savet e vo en-dro ivez, an abadenn "IS" hon doa krouet e-doug ar goañv.



B: Peur e vo tu da welet an abadenn dañs "Anjela DUVAL" hag e-pelec'h ?

S.J: Savet e vo evit ar wech kentañ d'ar **Gwener 10 a viz Eost** e sal ar gouelioù e **Pont-n-Abad** (Bro ar Vigoudenned). Spi 'm eus e vo tu d'he sevel en-dro, marteze da-geñver dekvet dez-ha-bloaz Anjela DUVAL e 1991.

B: Pesurt skoazelloù ho peus ? Gant ar c'harioù, an departamant, ar rannvro ?

S.J: Ar bloaz-mañ hon eus bet ur yalc'had 6000 lur gant an departamant, unan 3000 l gant kêr Bouldreuzig hag unan 1000 l gant kêr Ploneour. Evit sikour ar skolidañs eo bet roet doomp an archant-se : ar c'hentelioù, prenañ binvioù evit an abadenn. Ouzhpenn an abadenn "Anjela" e vo krouet un abadenn all d'ar **27 a viz Gouere** e **chapel Penhors** e **Pouldreuzig**, war vord ar mor, diwar-benn "Dispac'h ar Bonedoù Ruz" a oa c'hoarvezet er vro e 1675. Ouzhpenn dañs a vo en abadenn-se : kanaouennoù eus Barzhaz Breizh gant **Louise EBREL** (merc'h Eugénie GOADEC, unan eus ar c'hoarezed) ; pedet e vo ivez **Seij AN DUIGOU**, istorour, da gomz diwar-benn ar **Bonedoù Ruz**, en deus skrivet ul levr diwar o fenn. Savet e vo en-dro an abadenn "Bepred"

B: Pesurt sonerezh a implijit peurliesañ evit hoc'h abadennoù ?

S.J: Implij a reomp muzik **Dan AR BRAZ**, **Gilles SERVAT**, **Alan STIVELL**, **BLEIZI RUZ**, **Roland BECKER**, **E.V. GWENDAL**, **GWERZ**, **Mike OLDFIELD**, **GWALARN**, **TAMMLES**, **Per TALLEG**, hag all ...

E 1987 hon doa krouet an abadenn "Gwennva" e chapel Lanvern e

Ploneour gant **Per TALLEC** o soniñ ganeomp. Implij a reomp ivez muzik **René AUBRY**, **WOLLENWEIDER**, **Philip GLASS** ... ha muzik hengounel broioù Afrika, Indez ha muzik klasel ivez.

Met kavout a ran a-bouez-tre diskouez d'ar yaouankiz muzik hor bro zo ken modern ha muzik Amerika pe bro Saoz.

B: Pelec'h zo kentelioù dañs ganeoc'h ?

S.J: E **Pont-n-Abad**, **Ploneour**, **Pouldreuzig**, **Ar Gelveneg**, **Plogastell** ha **Pornaleg**.

'Benn an 10 a viz Eost eta, e **Pont-n-Abad**, evit an abadenn "Anjela DUVAL" gant **Tamm-Kreiz/Skol Dañs Bro ar Vigoudenned**.

"BARZHAZ BREIZH" enoret e Paris

Bep bloaz e vez roet e Paris prizioù da bladennoù gant an Akademiezh Charles Cros.

Er bloaz-mañ ez eus bet enoret div bladenn diwar "Barzhaz Breizh" **Kervarker**. An hini gentañ, anvet "Les sources du Barzaz Breizh aujourd'hui", hon eus bet tro da gomz amañ diwar he fenn, zo kenembannet gant "DASTUM" ha "LE CHASSE MAREE". Eben, "Barzaz Breizh" hec'h anv, a zo bet graet gant **Andrea Ar Goulh**, a zo embannet gant "Coop Breizh".

"CHARLES CROS" c'hoazh hag adarre : **Erik MARCHAND** ha **GWENDAL**

Ur priz all a zo bet roet gant an akademiezh c'hall c'hoazh da **Erik MARCHAND** evit e bladenn "An henc'hoù treuz", embannet gant **Radio-France** (dastumad "En France"), kanaouennoù eus **Karne Uhel** (Kreiz Breizh, evel a vez laret bremañ) eilat gant al luth hag an tabla.

Enoret eo bet ivez ar strollad **GWENDAL** evit ar bladenn nevez "Glenriver". Tu a vo da glevout ar sonerien "jazz-rock" keltiek-se, brudetoc'h e Bro-Spagn eget e Breizh, da geñver **Gouel ar Brezhoneg** e **Karaez**.

Da c'hortoz, re vat e vez kavet ar pladennoù-mañ moarvat evit ma valent klevet war ar gwagennoù.

KILAQUINN
Kazennet diarnuzet
brezhoneg - galleg

36-15
TC / KELA

- Kalier ar vro
- Gouelioù, Festoù nos ...
- Levrioù neves embannet
- Skol Uhel Ar Vro
- C'hoarioù

SEVENADUR

KELEIER

Gouel ar filmoù keltiek

Daou eus ar c'hwech' priz roet e "Gouel ar Filmoù Keltiek" a oa er bloaz-mañ e **Gaoh Dobhair**, e Donnegal, en Iwerzhon, zo aet gant Bretoned.

Marie HELIA he deus "priz an oberenn gentañ" gant hec'h "**Usine Rouge**", testenioù gallek eus buhezioù tud eus Douarnenez, ha **Jean-Pierre LE MOULAND** hini an abadennoù evit ar vugale gant "**Régne de Sucre**", ur film merc'hodennoù.

Gant **AN HERE** e vo lidet digoradur e vurevioù nevez e Kergleuz, straed Gay Lussac, er Releg Kerhuon, d'an 11 aviz Mae 90.

War an hevelep tro e c'hallor gwelet an diaz-titouriñ a vo sollet warnañ aozadur ar geriadur hollvrezhonek da zont.

DIHUN a zo anv ur gevredigezh nevez tadoù ha mammoù a glask kreskiñ lec'h ar brezhoneg en deskadurazh.

DIHUN, Ti-kêr PLOUVIEN, 29860 PLOUVIEN



Skol Uhel ar Vro

D'ar 26 a viz Mae e Pondivi, e palez ar C'hendalc'hioù, da 2 eur g.k. e vo **Bodadeg Veur Izili Skol Uhel ar Vro**.

D'an 29 a viz Gwengolo, en Alre, e vo roet medalennoù an Erminigou.



Miz Mezheven

D'an 23 ha 24 a viz Mezheven, e Jugon (Bro-Sant-Brieg), **FEST AN DOUR**, aozet gant "**Les Varts Bretons**" dindan paeroniezh Antoine WAECHTER.

FINALE KAN AR BOLB 90

Kan ar Bobl 90

Bet e oan e "**Kan ar Bobl**" ar bloaz-mañ adarre, ar wech kentañ abaoe pell. Siwazh n'em eus ket klevet al laz-seniñ "**Telenn**" eno, eus ar c'haerañ, a voe laret din goude. Aes a-walc'h da grediñ, goude gwelout, ha klevout anezho e-barzh ar skinwel, er zihun war-lerc'h.

Denez **PRIGENT**, eus Santeg, a zo bet enoret ivez, n'eo ket prest e

vrud da baouez da greskiñ. Ar prizioù kanañ all zo aet gant **Nolwenn LE BUHE** (Bro-Wened) ha merc'hed eus kelc'h keltiek Roazhon. Muioc'h a dud koulskoude a oa o selaou ar vugale, en ur sal kalz re vihan, hep uhelgomzer ebet, ur vezh. Ma ne c'hall ket "**Kan ar Bobl**" degemer dereatoc'h ar vugale en Orient a vefe gwelloc'h diouzhtu kas ar gouel-mañ e lec'h all.

M.K.



"Prix des Ecrivains bretons"

Aet eo ar priz-mañ gant **Roger RICHARD**, eus Brest, evit "**AZILIZ**" ar c'hentañ romant gallek embannet gant "**Brud Nevez**", an droidigezh vrezhonek o vezañ war ar stern. Gant "**Brud Nevez**" ivez eo aet ar priz "**Pet ROY**" evit levr an eskob

Visant FAVE "**War roudoù** (hjar misionerien". Enoret eo bet ivez "**Camille Le MERCIER D'ERM**", gant **Bernard LERAT**, hag "**Anthologie de la poésie bretonne**" **Antoine ANTONAKIS-LE CLECH**.

kemennadennoù

AN OALED

Ar bloaz paseet e-pad an hañv em eus bet tro da grediñ gant ma labour nevez en ur ober war-dro ar c'hreizennoù vakañsoù e brezhoneg ha, dre-se, ober war-dro ho pugale. Ur soñj vat 'meus dalc'het deus an degouezhioù-se.

Plijet-tre e velen gwelout a'chanoc'h o tont en-dro ar bloaz-mañ, hag e fell din sachañ hoc'h evvezh war un nebeut poentoù :

DA VRO EUSKADI e yaio bugale kreizenn miz Eost. Ar priz a vo dereat-tre dre ma vo graet un eskemm lec'hioù gant ur greizenn heñvel ouzomp, staget ouzh SEASKA.

UR GREIZENN ALL a vo dalc'het e LANDELO e miz Gouere. Troet e vo kentoc'h war an natur, ar c'han, an dañs.

Kroget eo mat-tre an traoù evit an hañv-mañ. Arabat deoc'h neuze gortoz ar mare diwezhañ. Ho peñz soñj :

-e vo dalc'het **AN HOLL GREIZENNOU** dre ma vez bugale enskrivet e pep hini anezho.

-e vo graet distaolioù d'ar familioù a gas meur a vugel (ha d'ar skolioù ivez).

Keññ ganeoc'h a vo atav ur blijadur. D'an deiz-se, neuze.

Y.F. JACQ

Keleier Bro-Vigoudenn

Izili kevredigezh an ASRIP(*) o deus aozet e miz Ebrel ur welladenn war vord an Odet evit an dud dedennet gant buhez laboused ar stêrioù.

Ar welladenn 'zo bet graet penn-da-benn e brezhoneg evit brasañ plijadur ar berzhioù deit a-bep korn eus Bro Vigoudenn.

(*)ASRIP : Kevredigezh evit difenn ar stêrioù.



RADIO-BRO RADIO AR VREIZHIZ E PARIS 88.2 MHZ

Program miz Mae 1990 d'ar gwener da noz.

8e-Kinnigadur program ha sonerezh 8e30 **Pennad-stur** gant Serj. 8e35 **Keleier** (brezhoneg ha gallek) displeget gant Serj ha Marsella. 9e **Mesk-divask** (keleier sevenadurel, festoù-noz, c'hoarioù hag all) gant Evelin. 10e "**Breizh Hlizi**", magazin (d'ar 4/05 : Rentañ-kont prosez Jilbert KABON ha Jean-Yves MEUDEG. Kemer a raio perzh en abadenñ tud eus ar c'homiteoù-skoazell hag un alvokad, d'an 11/05 : "**Mojenn an Ankoù**", ur studiadenn diwar-benn Anatol Ar Braz gant Doming, d'an 18/05 : Magazin ar brezhoneg gant Serj Richard, d'ar 25/05 : **Ekonomezh** gant Yann Fievet. 11e **Sonerezh pe gonc'hennoù** : d'ar 4/05 : abadenñ sonerezh kaset en-dro gant "Derrière de chez mon Père", d'an 11/05 : abadenñ sonerezh kaset en-dro gant skipailh Radio-Bro, d'an 18/05 : 7vet lodenn saga "Marion ar Faouet" gant ar c'honter Gwendal ar Floch (divyezhek), d'ar 25/05 : kaha-diskan gant Maoris, Serj, Tiert, hag all).

RADIO-BRO BP 639 75367 Pariz Cedex 08. Pgz 47610075.

Emañ Radio Bro o klask tud (brezhonegerien) d'ober war-dro an abadennoù d'ar Gwener da noz.

Ma z'oc'h dedennet, skrivit pe beilgomzit da :

Radio Bro
Boest Post 639
75367 PARIZ CEDEKS 08
Pgz. 47 61 00 75

DEVEZHIOU-STUDI BREZHONEK

Eus ar Gwener 31 a viz Eost d'ar Merc'her 5 a viz Gwengolo, e vo dalc'het "22vet kendalc'h-studi brezhoneg" "**AR FALZ**" e Kiberen.

Kentelioù brezhonek, kan ha dañs, prezegennoù, beilhadegoù ha festoù-noz.

Evit gouzout hiroc'h, skrivañ da **AR FALZ**, 6 straed Hir, 29 600 MONTRIOULEZ. (Pgz. 98 62 17 20).

Diwan

Un devezh "Dorioù digor" zo bet e skol Diwan Montriolez d'ar Sadorn 7 a viz Ebrel. 15 skoliad a zo bremañ er skol-vamm ha tri anezho prest da vont e kentañ derez a-benn miz Gwengolo 90.

BRUDEREZH :

E miz Gwengolo 1990 e vo graet e Sant Jakez Turki (Bro-Galaika) ur mizvezh staj war ar galianeg.

Nemet studieren eus estrenvioù 'vez degemeret er staj-mañ ha daou live 'zo : unan evit an deraouerien, hag un eil evit ar re o deus c'hoant mont war-raok gant ar yezh. Ur yañhad arçhant 'zo da gaout ivez. Evit titouroù all, skrivit ar buanañ ma c'hellot da :

O Instituto da Lingua Galega Santiago de Compostela Galiza/Bro Galaika (ESPANHA/BRO SPAGN)

Notenn : desket 'vez skrivit ar "Xunta" !

Robert BAXTER

Skrivañ da : **AL LIAMM**
16, straed des Fours à Chaux
35400 - SANT MALO -

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 150 kr (studieren, tud dilabour : 100 kr)

lennet hon eus...



KELAOUENNOU
Diwan 5000 skoliad
Breizh Bemdez
bremen

"Pour une déclaration universelle des droits des peuples", gant François RIGAUX (Chronique Sociale, 130 lur gall).

Ul levr studi eo hemañ, ul levr stourm evidomp ivez, nemet ar re troet gant ar gwir pe ar brederouriezh (pe an istor) eo a vourro ar muiañ ouzh e lenn, a gredan.

Pemp rann a zo e-barzh :
En hini gentañ ez eus kaoz eus meizad "ar bobl" a-hed an istor ; en eil eus gwir ar pobloù hag an demokratelezh ; en drede eus aotonomiezh ar vroad ha sevenadur ar pobloù ; er bevare eus ar gwir etrevroadel ; er bempet eus gwirioù an dud ha gwirioù ar pobloù.

Displegañ a ra an oberour e pe stad emañ kudenn gwirioù ar pobloù ha dezrann a ra Diskleriadur hollvedel Gwriou ar Pobloù, embannet en Alger e 1976.

(Chronique Sociale, 7 rue du Plat, 69288, LYON CEDEX, 02, BRO-C'HALL).

Herve PENNEG

KAZETENN BRO-ROAZHON (Meurzh 1990) niv.2

Kelaoenn "CRIB" hag an "UPRACB" (Kevredigezhioù breizhek Bro-Roazhon) a lenner diwar he fenn he deus da bal "difenn yezh ha sevenadur Breizh penn da benn".

Gâr ebet e-barzh diwar-benn manifestadeg ar 17 a viz Meurzh e Roazhon.

Ti ar Brezhoneg

Keleier fresk !
• PARIZ : BARZAZ TRIO, e Ti ar Vretoned, d'ar Sadorn 12 a viz Mae.

19 a viz Mae 1990, adalek 15e30

• un diskouezadeg Kizelladurioù. An arzour Melan GIBOUT, a vo e TAB evit komz deus e labour ganoemp.

• ur brezegenn diwar-benn bro-Indez gant Nolwenn HENAFF, ur vreizhadez he deus bevet ha studiet e-pad ur bloavezh du-se.

Deuit niverus eta !

TI AR BREZHONEG
15 rue des Tourelles
PARIS 20ème
Pgz : 43 64 63 33

"AR FALZ" niv. 69
1990

Ne vez ket stank ar pennadoù brezhonek e-barzh "AR FALZ" abaoe pell zo. An niverenn-mañ, n'eus nemet pennadoù gallek emni, a zo gouestlet da wirioù ar pobloù, en enor d'ar bloavezh 1989.

Un niverenn eus ar re zedennusañ eo hemañ, ha da gentañ-penn gant pennad Wolfgang GEIGER "Gwirioù Mab-den e Gwelo Prokrustes", diwar-benn ar stad vroad, ar yezh-stad, hag ar gwaskerezh yezhel en ideologiezh an dispach gall.

Evel "PARIS ACCAPAREUR" ("AR FALZ" niv 65-66), diwar ar memes plüenn, e teu pennadoù ar gentsinerian all eus ar gazetenn alamanek POGROM (miz Gouere 1989), embannet gant "Kevredigezh evit ar Pobloù en Arvar" (bet "selaouet" gant polis kuzh Alamagn ar C'hornog e-pad 10 vloaz l).

Ar skridoù all, diwar-benn emsavadeg Haiti e 1971, hag Elzas, Norzhauskadi (gant Jokim APALATEGI) Okitania (gant Robert LAFONT), Norzkatonia (gant Joan DORANDEU) a zegas da soñj pouez an dispach gall er broioù-se.

Un dibab eus melladoù Prezegenn Wien (miz Genver 1989) a gloc an niverenn stourm talvoudus-mañ.

Z.M.

AR C'HELAOUENNOU E BREZHONEG etre 1830 ha 1946 gant Lukian RAOUL

Graet e vo ar brezegenn e Oaled Abherve, Kreizenn sevenadurel breizhek, e Sant-Brieg, 9 straed JJ ROUSSEAU, ar Meurzh 15 a viz Mae 1990 da 8 eur 30 noz. E galleg e vo graet.

Kelenner e lise Chaptal Sant-Brieg eo Lukian RAOUL. Bet eo bet pennkazetenner "L'avenir de la Bretagne" etre 1964 ha 1975. "Un siècle de journalisme breton" a zo bet skrivet gantañ ivez, un oberenn a-bouez anezhi, un diazez enklask evit ar studieren hag ar furcherien.

Dibabet en deus komz eus ar c'helaoennoù skrivet e brezhoneg adalek ar mouladurioù kentañ betek dibenn an eil vrezel bedel.

Skeudennet e vo e brezegenn gant bannadurioù.

Kenlodenn vizoù : 20 lur.

OALÉD ABHERVE
9 straed JJ Rousseau
22000 SANT BRIEG

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper
Koumanant bloaz : 100 lur
Skoazell adalek 130 lur

KINNIGOU-LABOUR

Emañ **DASTUM** o klask ur merour a vo fiziet ennañ aozañ ur mererezh war urzhataerezh, ober war-dro mererezh ar gevredigezh, heuliañ an implijidi oñch ober war-dro ar c'hontaouerezh, klask skoaziadoù-archant. Daou vloavezh-studi goude ar vachelouriezh war ar mererezh pe ar c'hontaouerezh. Gwelloc'h e vo kavet unan barrek war ar mererezh dre urzhataerezh. Mat e vo bezañ troet gant buhez ar kevredigezhioù ha sevenadur Breizh. (Brezhoneg gant BREMAÑ).



KENVREURIEZH SANT ERWAN

• Bodadeg an tiegezhioù kristen a zo bet dalc'het e ROSTREN e skolaj Kampoal, d'ar Sul 8 a viz Ebrel.

• En hevelop dez e oa un emvod e PLOUEG-AR-MOR evit enoriñ memor Armañs AR C'HALVEZ, a savas eno Skol divyezhek Sant Erwan e dibenn ar bloavezhioù 50. Ur biakenn a zo bet lakaet en e evnor war blasenn ar post. Ur 80 bennak a dud a oa gant o Fred hervez ar c'hazelennoù. Moarvat e oa aet di un toullad skoldi bet gwechall ar skol du-hont, tadoù a familh bremañ, hag o dije bet gallet bezañ ganimp e ROSTREN a-hend-all ...

• Un nebeut disentezioù a zo bet kemeret :

- 1- ober ur vodadeg all e miz Gwengolo.
- 2- Kenderc'hel gant ar c'hannadig "HENTOU" bep daou viz, hag ober anezhañ ur wir gelaouenn evit ar familhoù.
- 3- Evit Kamp Katekiz an hafiv (6-11 a viz Eost) e ROSTREN, degemer bugale eus 7 da 15 bloaz. Graet e vo strolladoù hervez an oad, unan evit ar re vrasañ, 14-15 bloaz.

• **GOUEL BROADEL AR BREZHONEG**, 1,2 ha 3 a viz Mezheven (Pantekost). Lidet e vo un ofernenn en iliz parrez KARAEZ d'ar Sul 3/6 da 14.15.

• **Klasoù divyezhek prevez ?**


Kaoz 'zo e vije savet ur c'hlas divyezhek katolik e GWENED e miz Gwengolo 90. 2 skolar zo bet kavet endeo. E Bro-Leon e vefe kaoz da sevel unan ivez. Keloù mat eta. Pegouiz e vo savet unan en eskopti SANT BRIEG ?

• **BODADEG MIZ EBREL**

Dalc'het e oa e Kastell Santez Anna, e TREGASTEL, e-kichen an oad, d'ar Gwener 20 a viz Ebrel.

Yann TALBOT

gerioù-kroaz miz Mae




A-LED F.A.C.

- 1 OBER A RA WAR-DRO AR MEKANIKOÙ.
- 2 EVIT LAKAAT BRAV UL LEVR.
- 3 RAKER- N'EUS MUI A SKLENTENN EN E SAC'H.
- 4 A-DAL-TRUMH - TIRIAD UR DOBL.
- 5 LODENN - NOTENN.
- 6 HEVELEP - RAGANV.
- 7 E BRO-BOURLED - EN-DRO D'AN ESA.
- 8 SKOURJEZAÑ.
- 9 UNANIN DAOU DRA - DASTUM WAR AN AOD.
- 10 UN TAMB - NEPELL DIOUZH DAMGAN.

A-SERZH

- I TAD ANNA - FROUEZH AR GWENAN.
- II AR BUANAÑ AR GWELLAR - DONEZON.
- III WAR-DU ENO - WAR C'HOUNEREZH KRAOZHON.
- IV TAOLENN.
- V DONT A RA D'HOR BRO E-PAD AN HANV.
- VI SKEUDENN BAGAN - GER-NAC'H.
- VII MANN EBET - LAKAAT UR VANDENN.
- VIII FICHAÑ E VLEV - AR GWINEGOUR IAR.
- IX GER-MELL - PEBEZH C'HOART I.
- X ETRE AR MILUN HAG AN OUD - A-OUEZ D'AN HOLL.

gerioù-kroaz miz Ebrel



BREMAN NIVERENN 104
MIZ MAE 1990
TAOLENN

Lizhiri.....	2
Prosez.....	3
Diwan.....	4
Keleier Breizh.....	4
Bro Sina : Niveridigezh.....	5
Lituania.....	7
Katalonia.....	8
Euskadi - Korsika.....	9
Gwaskerezh.....	10
Abadenn Dañs. e Roazhon.....	11
Berr ha Berr.....	12
Abadenn Dañs.....	13
Tamm Kreiz.....	14
Keleier.....	15
Kemennadennoù.....	16
Levrioù.....	17
Gerioù-kroaz.....	18
Golo (Diwan).....	19
	20

PENNADOÙ GANT Gwenaél Caradec, P.Herve, L.M., M.K., Y. Vark Thorel, Loëiz Mahe, Y. Marie Moal, Mi.Be., Daniel ar Gevell, Paol ar Meur, Herve Penneq, Lena Louarn, Yann Talbot, Iwan Kadored, F.A.C.

MAKETENN GANT Nolwenn Louarn, Jean Michel Roynard ha Lena Louarn.

LUC'HSKEUDENNOU GANT Enbata. N.Obs., O.F., M.K., Tamm K., Lena Louarn.

SKOAZELL GANT Linn Bourdier. Laorñs Motrot.

RENEREZ BREMAÑ Lena Louarn

Moulet e ti moulerezh OSCR Tachenn Veurzh - ROAZHON -

KOUMANANT BLOAZ : 150 lur - Estren-Vro : 200 lur, skoazell adalek 200 Lur - Kasit ho chekenn da Vremañ : 8 straed Hoche 35000 ROAZHON

SKRIVIT E-BARZH BREMAÑ !!!
Kasit ho pennad, keleier ha luc'hskeudennoù a-raok ar 26 a viz Mae. 8, st Hoche 35000 ROAZHON

99.38.75.83.

